

Brizeug (An Oriant 1903 - Montpellier 1858)

Teleñn Arvor

Furnez Breiz

(Bet advoullet gand Roparz Hemon, e 1929)

Modernnaet eo bet an doare-skriva).

Roll ar pennadou

Teleñn Arvor

An delenn

Barzoneg pe Kanaouenn ar Vretoned

Son an nevez-amzer

Ar bleun lann

Pedenn al labourerien

Paotred Plomeur

Al liorz

Son an tacher

Aotrou Flammig

Mari

An dero

Rimou bihan

Furnez Breiz

Lavariou war meur a dra

Diwar-benn ar merhed hag an dimeziou

Dwar-benn ar gwin

Diwar-benn an danvez

Diwar-benn al labour

Almanak al labourerien

Diwar-benn ar broiou

Triveder Kerne.

Diwar-benn ar gemenerien.

Diwar-benn ar vilinerien.

A bep seurt.

An delenn

Dilezet war gerreg ar mor,
Tevel a ree an delenn aour,

He horvig hanter-zigoret,
Hag he hernidigou torret.

O weled eun dizeur ken braz,
Ma halon ivez a rannas ;

Me 'gavas enni eun nervenn,
Hag he stagas ouz an delenn.

Eur gordennig a garantez ;
Ar re all a stagis ivez.

Evid peb oad, evid pep stad,
Bremañ 'zon ar zonerez vad.

Sonit, telenn ! Ar Vretoned,
Kalz konfort, allaz ! n'o-deus ket.

Barzoneg pe Kanaouenn ar Vretoned

War don : An hini goz

Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

O ya ! d'ar brezel, paotred taer,
Paotred vad ha seven er gêr,
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Tehed a ra 'r Saoz penn-da-benn
Pa lavarom-ni : « Torr e benn ! »
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Hogen, kleveit en euredou
Kanaouenn skiltr ar biniou.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

O ! Breiz-Izel !, o ! kaerra bro !
Koad en he hreiz, mor en he zro !
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Allaz ! mar dlean Breiz kuitaad,
Me 'ouelo 'leiz ma daoulagad.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Mirit, breudeur gêz, ho pennbaz,
Ho pleo hir, ho pragou braz.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Gourenit mad ! Eur gourener
En-desu kalon ar merhed kaer.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Me droho ma zeod em beg
Ken dizeski ar brezoneg.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.
Karantez dit, bro garadeg !
Breiz-Arorig, douar derveg¹.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Koulskoude, dreist an oll vadou, `Karom ar Hrist, Doue on tadou.
Ni 'zo bepred
Bretoned,
Bretoned, tud kaled.

Miz Gouere 1836.

¹ derveg : douar leh ma'z eus gwez-dero.

Son an nevez-amzer

Da Jeromig, euz Kervegen.

Eun Tremeniad

Setu an nevez-amzer.

Petra 'ganit-hu, mêsaer ?

Mêsaerig kêz, petra 'gan

Al labousig war al lann ?

Ar mêsaerig

Al labous, gand levenez,

'Gan ha 'gan e vignonez.

El lann, evel peb labous,

Peb mêsaer a gan e zous.

An Tremeniad

Gwell a ze ! Kanit atao !

N'eo ket hir an amzer vrao.

Karit mad ha kanit stank,

Laboused ha tud yaouank.

Ar bleun lann

War don : Evnig a gan er hoad uhel.

Ar plah

Hag e pe amzer evidon,
Den yaouank, e verv ho kalon ?
Klevit !, p'emañ ar bleun el lann,
Pe ar bleun melen er balan ?

An den yaouank

O-daou, 'vad ! o-deus bleun melen,
Lann ha balan, koantig Elen.
Hogen el lann emañ, emgiz,
Bleun karet gand ar yaouankiz.

Ar plah

Ha perag, ma mignonig kêz,
Lann en-deus bleun ar garantez ?

An den yaouank

Setu perag, mignonez ker :
Lann en-deus bleun e peb amzer.

E miz Mezeven

Pedenn al labourerien

War don : Santez Mari.

O ! sant Alan, sant bro-Skaer, steredenn Vreiz-Izel,
Levenez an êlez dindan o diouaskell,
Diouz ho kador alaouret ha savet dreist al loar,
Roit eur zell karantezuz deom war an douar.

Allaz ! ni 'zo tud paour, tud paour diwar ar mêz !
Koulskoude d'ho ti santel e teuom aliez,
Ya ! dre ar falla hentou, hañv-goañv, e teuom oll,
Skornet bep sul gand an erh, devet gand an heol.

Eun divenner a glaskom : kriz eo or buhez.
Warnom al labour atao, atao ar baourentez.
Bemdez kalon an douar a doullom gand an houarn,
Re all a zebr ar gwiniz hadet gand on daouarn.

Hogen, sellom uhelloc'h ! Eur bed all a vezo,
Pep unan diouz e ober neuze en-devezo :
Fall labourer an hini a gav e veh re vraz,
Ha fall gristen an hini na oar dougen e groaz.

Evel bugaligou kêz tostaet en-dro d'o zad,
Setu-ni oll daoulinet en-dro deoh, sant mad ;
Kalz ahanom er vro-mañ, kalz o-deus hoh ano,
Er bed-mañ hag er bed all, bezit ganeom atao.

O ! sant Alan, sant bro-Skaer, steredenn Vreiz-Izel,
Levenez an êlez dindan o diouaskell,
Diouz ho kador alaouret ha savet dreist al loar,
Roit eur zell karantezuz deom war an douar.

*Da gonforti ar Vretoned,
Ar bedenn-mañ am-eus savet.*

Skaer, e miz Eost 1843.

Paotred PLomeur

Gwerz

Tud yaouank, tud hlaharet da guitaad ar vro ;
Kasit ganeoh, kasit an esperañs atao :
Skedi a ray war ho hent evel eur sterenn gaer,
Ha dirag ho taoulagad pa zistroot d'ar gêr.

Bez' e oe eun amzer, eun amzer du ha kriz,
An oll dud yaouank a roe malloz d'o yaouankiz.
A-rummadou da Vro-Hall, mond a reent beb bloaz,
Allaz ! ne zistroent mui da Vreiz-Izel biskoaz !

Nann ! e peb leh euz a Vreiz ne weled o vale
Nemed ar re vahagnet, re goz, ha bugale.
Ne oa gour da labourad na da vlenia an hael².
Ar gwraez a ehanas en diwez da henel.

Napoleon 'oa ar roue, ar gwir vleiz a vrezel,
Hep truez d'ar mammou paour a skrape o bugel.
Lavared 'reer er bed all emañ en eul lennad,
Emañ beteg e henou en eur poull leun a wad.

Pa oe anvet re Blomeur d'al lazerez braz-se :
« Ar bleiz 'zo gand an deñved, emezint neuze !
Ya ! an droug a zo warnom ! Dougom eta on droug.
Ha d'al loen gouez ha fero astennom or gouzoug. »

D'ar beleg e lavarjont : « Setu deiz an anken,
Gwiskit ar stol wenn ha du evid or binnizien. »
D'o herent : « Gwiskit ivez ho tillad kañv ha du. »
D'ar halvez : « Grit evidom, grit eun arched dioustu. »

Tra spontuz ! dre ar parkou hag al lann 'oe gwelet
Ar zoudarded yaouank-se o tougen o arched.
Rena a reent d'o bez ha dirazo o haoñ³,
O kana gand ar beleg pedenn an ananon.

Meur a zen karantezuz euz an oll dreoiou⁴
'Oa deuet gand goulou-koar, ar hloh hag ar hroaziou.
Daoulinet war lez an hent, eun darn a lavare :
« It, kristenien ! Evidoh, pedi a raim Doue. »

E-kreiz lann vraz ar Gosker, war lezenn ar barrez,
Chom a reas tud ar hañv. Eno 'oe an enkrez :
En arched e oe taolet o bleo, o gouriz,
Hag ar hañv oll a ganas neuze : *De profundis* !

² da vlenia an hael : iskiz : da vlenia traou hael.

³ o haoñ : o hañv.

⁴ an oll dreoiou : an tro-war-droiou.

An tadou a hirvoude, allaz ! hag ar mammou
A strinke o tifronkal o ene d'an neñvou.
An oll etre o divreh a halve o mibien.
I, evel pa vent maro, ne laavrent mui ken.

En eur zioulded kristen, hag hep selled a-dreñv,
Kuit ez eent o tilezel o buhez gand Doue.
A-hed ar gwenodennou ez eent daou-ha-daou,
Ken trist hag anaon, tristoh hep lared gaou.

Gand Doue emaint, siwaz ! ha dindan an douar
O eskern a zo gwennoh eged ar goulou-koar.
Ar gerent, nehet ivez, er bez 'zo diskennet :
An tadou hag ar vibien, oll ez int tremenet !

Tud yaouank, tud hlaharet da guitaad ar vro,
Ar peoh a zo er bed hag ar bed a zo brao.`
It eta a galon vad e-pad ho yaouankiz !
C'hwi a lavaro eun deiz : « Gwelet em-eus Pariz ! »

E miz Ebrel 1839.

Al liorz

D'an Aotrou Yann ar Beg, kelenner.

War don : Teofilus.

'Lez eul liorz dudiuz a oa hanter-zigor,
Eur wraha a lavare 'giz-se war doull an nor :
« Bokedou 'zo amañ, va Doue, ha frouez !
Ha traou mad da zebri, ha da hwesa ivez !

« Eul liorz all 'anavezan, alalz ! eul liorzig du.
An Aotrou, pa zeuin, a zigoro dioustu ;
Evid kousked didrouz eul leh don am-bezo ;
Eun den pinvidig em harz marteze 'hourvezo. »

Hogen, eun den fur-braz 'oa o vale el liorz :
« Da betra, ma mamm goz, e chomit-hu er porz ?
Deuit em liorz, deuit ! me eo an Aotrou,
Mamm goz, debrit frouez, c'hwesait bokedou. »

E miz Du 1837.

Son an tacher

Er vourh abaoe ma choman,
Morzol an tacher a glevan.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Sellit e zivreh noaz ha du
O tistrei an houarn a bep tu.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

An heol kaer morse ne wel,
Bepred glou ha tan ruz er hovell.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Da vaga e vugale gêz,
Kant ha kant tach a ra bemdez.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Re all a ya d'ar pardonieu.
Eñ a chom da ober tachou.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Tachouigou, tachou penneg,
Hag a houarn evid eur gwenneg !

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Ehan a ra pep sul hepken
Evid kleved an overenn.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Dibaot a wech an tavarner
A wel en e di an tacher.

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !
Skei a ra e vorzol atao !

Bennoz Sant Alar ha Doue,

Ya, bennoz d'an oberour-ze !

'Hed an deiz, 'hed an noz e sko !

Skei a ra e vorzol atao !

Aotrou Flammig

War don : Ar vamm Mikaela

Setu 'n Aotrou Flammig, gwisket-flamm, gwisket-kaer,
N'eo ket mui eur mêziad, n'eo ket c'hoaz eur paotr-kêr.

Sellit e benn touzet, touzet gand ar hrevier :
N'en-deus ket bleo hir, n'en-deus ket bleo berr.

Dond a ra euz ar skol, klevom oll e brezeg :
N'eo ket mui brezoneg ha n'eo ket c'hoaz galleg.

Fougeer ha direiz, war bep tra 'krog e zent :
Goap a ra war an diaoul, goap a ra war ar zent.

Hanter vad, hanter fall, setu 'n Aotrou Flammig.
Allaz ! an oanig gwenn a zo deut eul louarnig.

Setu 'n Aotrou Flammig, gwisket-flamm, gwisket-kaer,
N'eo ket mui eur mêziad, n'eo ket c'hoaz eur paotr-kêr.

E miz Meurz 1843.

Mari

War don : Kont a Jafre.

Pa zeuan ken trist dre ho kêr,
Na spontit ket, tud ar Vouster.
Me 'glask ma hoant, n'on ket eul laer.

Dre-mañ me 'heulias aliez,
Em yaouankiz, eur plahig kêz,
Evel eul labous e barez.

Peleh emañ ar plahig kaer ?
Na spontit ket, tud ar Vouster.
Me 'glask ma dous, n'on ket eul laer.

Gand he hoof digor d'an avel,
Hi 'oa e-giz eun durzunell,
Pa 'n em zispleg he diouaskell.

Kollet eo an durzunell ger !
Na spontit ket, tud ar Vouster.
Me 'glask ma hoant, n'on ket eul laer.

Er vourh, goude ar gouspero',
An oll a lare, tro-war-dro :
« Honnez eo flourenn ar vro ! »

O ! yaouankiz flour ha re verr !
Na spontit ket, tud ar Vouster.
Me 'glask ma dous, n'on ket eul laer.

E miz Gwengolo.

An dero⁵

Barzoneg

War don : Klevom, koz ha yaouank.

Kanom oll an dero, roue ar hoadou braz !
Kanom oll, tud yaouank, ha kanom ar gwez glaz !
Kriz eo an hini a droh an dervenned ;
Allaz ! kemend a wez e Breiz 'zo diskaret !

Ar gwez a zo santel ! Ar gorraged, bemnoz,
A zeu da gorolli war-dro an dero koz.
Hag an anaon kêz, da sklêrder al loar,
A skuill eno daerou, daerou war an douar.

Gand o deliou stank-braz, eun dero kantvloaziad⁶,
Ha gand e vleo hir war e chouk, eur Breizad
A zo evel daou vreur : heb lared gaou,
Leun a nerz, a vuhez, kernn ha kaled o-daou.

Gwelet em-eus, e Skaer, eun dero⁷ ken uhel
Ma save en neñvou e veg dreist an avel.
Eur gourener ivez, ken stard, am-eus kavet
M'en-doa ouz an douar e dreid 'gozig staget.

Ma ve gand ar gurun d'an douar diskaret,
Eul lestr gand e gorv don, eul lestr braz a vo greet.
Labourit 'ta, kalvez ! ha deuit, tud a vor !
Roue ar menezioù 'zo c'hoaz roue ar mor.

C'hwi ivez, mêziaded, deuit ! ha gand peb barr
Grit peulioù ha freillou, gand ar hef eun alar !
Mez savom da genta e kornig an hentou
Lammgroa war an hini⁸ 'oe staget on Aotrou.

'Tal ma bez, tud yaouank, c'hwi 'lakay eun dervenn,
Hag an eostik klemmuz a gano war he fenn :
« Brizeug, barz bleo-melen, amañ a zo beziet,
Hennez a wir galon 'gare ar Vretoned. »

Mezevenn 1837.

⁵ An dero : ober a ra gand "an dero" e-leh "an dervenn", lakaet gourel.

⁶ eun dero kantvloaziad : an dervenn gantvloazieg. Implijoud a ra "dero" e-leh "dervenn"

⁷ eun dero : c'hoaz, e-leh "eun dervenn"

⁸ an hini : "behini" er skrid orin.

Rimou bihan

Kimiadou

Allaz ! Setu an deiz da guitaad ho pro :
Kenavo, Kerneviz ! ya, tud vad, kenavo !
Kenavo, den yaouank ! Mez deuet⁹ c'hoaz, deuet !
Perag mond kuit pa ver gand an oll dud karet ?

Da Jesmi, barz Gwaskon

Barzig kêz, evid on diwall,
Lavarom d'ar Hallaoued fall :
« O kana Doue war ar mêz,
Peb labousig en-deus e vouez. »

Da Hersard

Amzer goz, o ! amzer santel !
Neuze 'kleved, e Breiz-Izel,
E pep koad kana an evned,
E pep kêr kana ar varzed !

Da Gaourintin

Barz yaouank desket ganin-me,
Kaner mad, merour mad ive',
Da gorv a vagez gand an ed,
Ha gand ar gwerziou da spered.

Da Ruskenn

Plahig, ho kalon 'zo heñvel
Ouz eur ruskennig leun a vel.
Hag ennoh, evel ar gwenan,
O vodn ho soñjennou bihan.

Ar rimouigou

Kan ar pennglaouig a zo berr,
Hogen ennañ pebez douster !
N'eo ket hir ivez ar Bater.

Yann Dousal hag e gemener

Dousal, gand e vragou-braz a oa eun den ! Dousal !
Bremañ gand e vragou hir en-deus van eur pesk sall :
Kemener ! kemenerig !
Te a zo eun treitourig !

⁹ deuet : deuit

Gwerziou skrivet war zor eur maner koz

Eur Horrigan, e-pad eun noz,
En-deus ma greet gand e nadoz.

War vez an Aotrou Ar Gonideg

Peulvan, deskit d'an oll ano Ar Gonideg,
Den gouizieg ha fur, tad ar gwir vrezonég.

War di an Aotrou Malo Korred

Kleze dir er brezel.
Levrig aour em hastell.

Furnez Breiz

Lavariou war meur a dra¹⁰

Gwell eo furnez eged pinvidigez.

Neb na oar a gavo desk.

Al lestr na zent ket ouz ar stur
Ouz ar garreg e ray sur.

Askre hlan diogell eo he ferhennez

Ha droug ha mad
A denn d'e had.

Mouchit mad ho kole bihan,
Pe 'hend-all ho-po poan gantañ.

Heudit mad ho marhig diank,
Pe en em veuzi 'ray er stank.

An hini na oar ket senti ne oar ket gourhemenn.

Didalvez eo koll amzer
Deski ar mad heb e ober.

An ivern a zo leun euz ar mennoziou mad.

Hennez a venn, hennez a hall.

Kasit an ero da benn.

Den mad, grit ho soñj :
Savit eun ti pe grit eul loñj.

Seul gentoh,
Seul welloh.

Aliez euz ar furnez
E teu ar horregez.

Gand kolo hag amzer
E veüra ar mesper.

Strinka an trebez war-lerh ar billig.

Teurel ar boned war-lerh an tok.

En noz e kemerer ar siliou.

¹⁰ Lavariou war meur a dra : meur a hini a zo iskiz.

N'eo ket gand an daboulin e vez paket ar had.

N'ez eus ket a enebour bihan.

Na hoariit ket gand al lagad.

Pep ki a zo hardiz en e di.

N'eo ket red teurel mein war-lerh kement ki a harz.

Komz gand eur zod, red eo gwelloh
Rei bleud gwiniz d'ar moh.

Arabad eo lakaad peñsel burell ouz limestra.

Barnit ar re fall evel ma fell deoh beza barnet.

Ar haz a vourr o logota
Hag ar hi o konikleta.

Lavared 'reer aliez gaou e-leh gwirionez.

Kant klevet ne zleont ket eur gwelet.

Klask pemp troad d'ar maout.

Ober an dañvad.

Digarez ober al leue.

Em milin n'eus ket dour a-walh
Evid mala hoh arreal.

Digand mignon eo gwell kaoud dour
Eged gwin digand an treitour.

Kared a reer an trubarderez,
Kasoni a zo ouz an trubard.

Breton biskoaz
Trubarderez ne reas.

Gwaz eo ar vevenn eged ar vezerenn¹¹.

Eur mignon mad a zo gwelloh eged kar.

Bugale ar gevinianted,
Gwasa kerent a zo er bed,
Ha gwella ma vint dimezet.

¹¹ Gwaz eo ar vevenn eged ar vezerenn. : ?

Heveleb tad, heveleb mab.

Mab diouz tad.

Mab eo dad eo Kadiou.

Janed eo matez Janed,
Janed hag he mestrez a ribot kevred.

Ar mestr mad a ra ar mevel mad.

C'hoant Doue ha c'hoant den a zo daou.

Beza an avel e leh ma karo,
Pa ra glao e hleb atao.

Goude c'hoarzin e teu gouela,
Goude c'hoari huanada.

O vond d'ar fest, c'hwi a gano,
O tond en-dro, c'hwi a ouelo.

Gortozit an noz evid lavared eo bet kaer an deiz.

Eun den kreñv, eun den krevet,
Eun neuer kaer, eun den beuzet.
Eun tenner mad, eun den lazet.

Diou, teir amzer en-deus an den,
N'int ket heñvel an eil diouz eben.

Dalhit mad ouz ar feiz, dalhit mad ouz ho lezenn.

Eur feiz, eur yez, eur galon !
Ar hiz koz, ar hiz wirion !

Eul liñsel wenn ha pemp plankenn,
Eun dorchenn blouz dindan ho penn,
Pemp troatad dour war-horre,
Setu madou ar bed er be'.

Aval, avelioui, oll avel.

Diwar-benn ar merhed hag an dimeziou

Gwell eo karantez 'leiz an dorn
Eged madou 'leiz ar forn.

Pa veh ken du hag ar mouar,
Gwenn-kann oh d'an hini ho kar.

An delienn 'gouez war an douar,
Ar gened ivez a ziskar.

Ar bleunig a dro 'wechigo',
Karantez ar plah 'dro atao¹².

Evid reiza ar bleiz ez eo red hen dimezi.

Dimez da vab pa gari
Ha da verh pa helli :
Gwelloh eo dimezi merh
Eged kaoud anken war-lerh.

A-ziwar moue ar gazeg
E vez paket an ebeulez.

C'hoant dimezi ha beva pell
O-deus peb Yann ha pep Katell.

Dimezet int, pell e vevont,
Oll war o hiz e karfent mond.

An dimeziou a-bell
N'int nemed touriou ha kestell.

N'ez eus koz votez
Na gav he farez.

Dimezet eo Yann Billenn
Da Janed Truillenn.

Frita laouen ar baourentez
War ar billig a garantez.

Eun drên-fuill a vez en ti
Mar deus begel o komnadi.

Yann ! Yann ! Yannig-Yann !
Yann diou wech Yann !

Gwaz mezhvier ha gwreg a hoari
A skarz taer madou euz an ti.

¹² Karantez ar plah 'dro atao : gouennelouriez e-keñver ar merhed.

Pep strodenn ha peb loudourenn
A gav mad he heustourenn.

'Vid ma ve krizet an aval mad,
N'eo ket kollet e hwez-vad.

Ar bank en tan ne lakaer ket
Dre ma ve an alhwez kollet.

'Lamot ket 'r hog digand ar yar,
Na yann ar Bohig digand par.

An durzunell a ra truez
Pa he-deus kollet he farez.

Diwar-benn ar gwin

Pa vez an den en e wrez,
Ne zant ket e vez paour-kêz.

Gwell eo gwin nevez
Eged mez.
Gwell eo gwin barr
Eged mouar.

Gwelloh tomm d'an treid dre ar botou
Eged d'ar hov dre ar genou.

Den koz, gwin koz en ho kwerenn.
En ho tas, den yaouank, dour yen.

An hini a ziwall sehed
A ziwall yehed.

Gwreg a ev gwin,
Merh a gomz latin,
Heol a zav re veure,
Pe ziwez ?... a oar Doue.

Lakad dour e gwin eun all.

Mui a win a zispigner er pardonioù
Eged a goar.

Diwar-benn ar brezel¹³

Skrigna 'ra bleizi Breiz-Izel
O klevet embann ar brezel.

Tehed a ra ar Zaoz penn-da-benn
Pa lavarom-ni : « Torr e benn ! »

Evel eur barr grizill er mor
Ar Zaozon a steuz en Arvor.

N'em-eus ket aon 'raog ar Hallaoued,
Kriz eo ma halon, ma dir lemmet.

Bez a Hallaoued pezh a garo,
Me ne dehan ket 'raog ar maro.

Ma varvom evel m'eo dleet
D'ar Gristenien, d'ar Vretoned,
Morse ne varvim re abred.

Ni 'zo bepred Bretoned,
Bretoned, taud kaled.

¹³ Diwar-benn ar brezel : gouennelour e oa Brizeug.

Diwar-benn an danvez

Gwell eo deski mab bihan
Eged dastum madou dezañ.

Gwell eo brud mad da bep hini
Eged kaoud madou 'leiz an ti.

Doue ouz ar stad ne zell ket.

Beza paour n'eo ket eur pehed,
Gwell eo koulskoude tehed.

An hini en-deus a lip e weuz,
An hini n'en-deus ket a zell a-dreuz.

Gwelloh moked eged reo,
Gwelloh arhant eged bleo.

Gwell eo merer pinvidig
Eged denjentil paourig.

Eun alhwez arhant a zigor
Gwelloh eged eun alhwez houarn an nor,
Gwelloh eged arhant eun alhwez aour.

Atao e kaver eost e amezeg
Gwelloh eged on hini.

Ker braz laer eo neb a zalh ar zah
Evel neb a lak e-barz.

Dibaot den ne binvidika
Oh ober gaou ouz e nesa.

Paourig pa binvidika
Gwaz eged an diaoul ez a.

Hag e veh euz gouenn ar hi,
Mar hoh-eus madou, deuit en ti.
Hag e veh euz gouenn ar roue,
Mar doh paour, it en ano Doue.

Madou 'zeu ha madou 'ya,
Evel moked, evel pep tra.

An danvez dastumet gand ar rastell
A yelo buan gand an avel.

'N hini a viras a gavas,
Antronoz veure pa zavas.

An arhant a zeu a-berz an diaoul,
A zistro, 'vad, da houarna Paol.

Êsoh d'ar mab goulenn ouz tad
Eged d'an tad goulenn ouz mab.

Pa zeu ar paour da doull ho tor,
Ma ne roit ket dezañ, respontit gand enor.

Pedenn o ribotad

Sant Youenn, Sant Yann,
'Lezi va ribot a amann ;
Hag eur bannig bihan a lêz
Evid ober d'ar paour-kêz.

Diwar-benn al labour

Beg ar soh, hag ar vronn,
Gand o-daou e vevom.

Laerez e amzer, e voued,
Brasa pehed a zo er bed.

Da louarn kousket
Ne zeu tamm boued.

Ki besk ha kaz diskouarnet
N'in mad nemed da zebri boued.

Da zadorn eo bet ganet
An ebat gand al labour greet.

Kamm ki pa gar.

Falla ibil a zo er harr a wigour da genta.

Eur spreheñn a zebr aliez kement hag eur marh mad.

Va mab, re goz an douar evid ober goap anezañ.

Deus da gleved an alhwederez
'Kana he son d'ar goulou-deiz !

Braz al labour, bihan an debri.

Diouz he dant 'vez goroet ar vuoh.

En douar fall e vez fall an ed.

A-barz ma vezo fin ar bed,
Falla douar, ar gwella ed.

Almanak al labourerien

Miz Genver

Avel ar hreisteiz
A zegas glao e-leiz.

Kanevedenn euz an noz,
Glao hag avel da hanternoz.

Reo gwenn er hresk,
Amzer gaer ha fresk.
Reo gwenn en diskar,
Amzer hleb heb mar.

Gwell eo gweled ki e kounnar
Eged heol tomm e miz Genver.

Miz C’hwevrer

Miz C’hwevrer a hwez, a hwez,
Hga a laz ar voualh war he neiz.

Gand dillad tomm ha bevañs mad
Peb miz goañv a zo deread.

Da ouel Matiaz
E choaz ar bik he flas.

Miz Meurz

E miz Meurz glao hag avel foll
A ray lakaad evez d’an oll.

Meurz gand e vorzoliou a lazo
An ohen ‘braz kornig ar hraou.

Da zul Bleuniou, kont ar viou,
Da zul Bask, terri o fennou,
Da zul ar Hazimodo, frika ar hoz podou.

Miz Ebrel

Bloavez gliz,
Bloavez gwiniz.

Pask pe Gazimodo
En Ebrel sur a vezo.

Pask gleb ha meurlarjez kaillareg
A lak an arh da veza barreg.

Sant Jorhdig diwar e dorchenn
A lak ar vuoh da vreskenn.

Pa vez glao da ouel Mark
E kouez ar hignez er park.

Miz Mae

Da viz Mae
'Lamm ar segal dreist ar hae.

Glao bemdez,
Nebeud beb eil deiz.

Pa gano kaer ar goukoug,
Ma buohig kêz a vevo.
Ha pa gano an durzunell,
M'em-bo lêz e-leiz ma skudell.
Evid ar ran pa gano,
Ma buohig paour a varveo.

An deliou 'zigor en dero
Kent ha digeri er fao.

Miz Mezeven

Eur park a zo gwall-fall
Mar da Vezeven ne dal'.

Gwalh da gorv e diwez eun de'
Bez laouen ha na zebr ket re.

Miz Gouere

Da ouel Maria Garmez
Gwelloh gaor eged eur vuoh lêz.

Pa vez glao da ouel Madalen,
E vreïn ar hraoñ hag ar histin (hesten)

Da viz Gouero, (Gouere)
'Lakaer falz war an ero.

Da gann Gouero (Gouere) ;
Eost e peb bro.

Da gann Gouere, gand e wastell wenn,
Ma ne vez ket azo an eost, e vo panenn.

Da Zantez-Anna neb 'ya
Anna n'ankoua.

Miz Eost

Pa vez glao da ouel eost,
Kollet eo ar hraoñ-kelvez.

Neb a ya da Zantez-Elen
Ne goll ket he foen (foan).

Miz Gwengolo

E miz Gwengolo
En abardaez 'mañ an dorno (dorna).

Da ouel Mazeo,
Ar frouez oll a zo azo.

Koulz er barroz hag en douar,
Sant Kado n'en-deus ket e bar.

Da ouel Mikael, da houlou-deiz,
An Tri-Roue 'vez er hreisteiz.

E Foar an Trokerez,
Eun ebeul evid eur gwenneg.

Miz Here

E miz Here,
Teilit mad hag ho-pezo.

Here, Du ha Kerzu,
A halver ar miziou du.

Ped ano kaer o-deus roet
Da benn ar bloaz ar Vretoned ?
Razarh, miizou du, rageost,
Diskar-amzer h dilost-hañv,
Skub-deliou hag hañv-goañv.

Miz Du

Eet miz Here en e hent,
Antronoz 'mañ gouel an Oll-Zent.

Kala-goañv, kaled greun,
Deliou kouezet, lennou leun.

Mad eo hada an douar
War an diskar euz al loar.

Segalig Sant-Andrez,
Deut Nedeleg pa zeuy er-mêz.

Hag o neza emañ-hu c'hoaz ?
Gouel Sant-Andre a zo warhoaz.

Miz Kerzu

Hañv-goañv beteg Nedeleg.
Diwar neuze 'vez goañv kaled,
Ken na vezo bleun en haleg.

Erh kent Nedeleg,
Teil er segaleg.

Eur gelienenn da Nedeleg
A zo koulz hag eur heveleg.

Pa vez loar wenn da Nedeleg,
E vez lin mad e pep havreg.

Miz Kerzu, berr zeiz, hir noz,
Gwenan a dav, broenn war roz.

Diwar-benn ar broiou

Kant bro, kant giz,
Kant parrez, kant iliz.

O ! Breiz-Izel ! o ! kaerra bro !
Koad en he hreiz, mor en he zro.

Mor Kerne a zo peskeduz,
Douar Leon a zo eduz.

Ma Doue, ma diwallit da dremen Beg-ar-Raz,
Rag ma lestr a zo bihan hag ar mor a zo braz.

Ne dremenas den ar Raz,
N'en-dije aon pe glaz.

Abaoe beuzet, Kêr-Iz,
N'eus ket kavet par da Bariz.

Pariz,
Par-Iz.

Pa ziveuzo Iz,
E veuzo Pariz.

Kastell,
Santel.

Kemper,
Ar gaer.

Oraint,
Ar goant.

Menez Arre, kein Breiz.

Kompeza Brasparz,
Diverina Berrien,
Diradenna Plouie,
Tri zra dihalluz da Zoue.

Pedenn ha pirhiriner

O ! Sent ma bro, ma diwallit !
Sent ar vro-mañ n'em anavezont ket.

Er barrez a Daole, eter an daou drêz,
Emañ ar brava berzoneg a zo e Breiz.

Brezoneg Leon ha galleg Gwened.

Non ha *oui*,
Setu galleg an ti.

Komz brezoneg evel eun Normand.

Eun Normand en-deus e lavar.
Hag eun den e zislavar.

Setu eur ger a wechall :
Skañv ha fougeer evel eur Gall,
Drougoberuz evel eur Saoz,
Rok ha morgant evel eur Skos.

Sod evel eur Gwenedad,
Brusk evel eur Hernevad,
Laer evel eul Leonad,
Treitour evel eun Tregeriad.

Kleier Sant Yann Keran a respont :
« Ar pezh ma'z om, ez om !
Ar pezh ma'z om, ez om ! »

Panez ! Panezenn !
Eul Leonad ne zebr tra ken.

Bara kerh fresk amanennet
A blij da Gintiniz meurbed.

Yotaerien, debrierien gaol,
Ar Zant-Briegiz a zo oll.

Fao ruz ha fao briz,
Setu brikez al Lambaliz.

Eur maill eo eul Lambalad
Evid ober kleuziou mad.

Gall brein¹⁴ ! Gall brein !
Sah an diaoul war e gein.

¹⁴ Gall brein : Feuket e vo sur a-walh meur a hini gand ar gerioù-ze. Memestra e ve red derhel soñj euz an amzer ma stourme gouarnamant Bro-Hall a-eneb ar yezou rannvro, ar brezoneg dreist-oll. Eun diktareiz yez a oa euz e bez.

Penn-sardinenn ar Gonkiz,
Penn-eog ar Gastelliniz,
Ha penn-merluz ar Gombridiz.

Beg meill, beg sall !
Re Gemperle ne zeblont tra all.

Triveder Kerne

Person Kemper a zo skolaer,
Hga hini Erge-Vraz marrer,
Hag hini Elien falher.

Person Konk a zo pesketaer,
Hag hini Beuzeg luzaouer,
Hag hini Melwen mestr-prezeger.

Peron Pont-Aen a zo kereer,
Hag hini Rosporden toger,
Hag hini Treo botaouer.

Person Kore a zo gwiader,
Hag hini Leuan kemener,
Hag hini Fouenant foigeer.

Person Tourh a ra barazer,
Hag hini Kernevel karrer,
Hag hini Skaer gourener.

Diwar-benn ar gemenerien

Nao hemener evdi ober eun den.

Neb a lavar erur hemener
A lavar ivez eur gaouier.

Diwar-benn ar vilinerien

Krampouez hag amann a zo mad,
Ha nebeudig euz pep sahad,
Hag ar merhed kempenn avad.

A bep seurt

A beb liou marh mad,
A beb bro tud vad.

Al laouenan a gar atao
E doenn ha kornig e vro.